

KANTIK SANT ROCH

VAR TON. : *Ni ho Salud, stereden vor N° 3.*


O c'hui guechall ken truezus
 Ouz an dud klanv hag ankenniet,
 Pedit ar Mestr trugarezus
 D'hor miret holl diouz pep klenved,
 O Sant Roch benniget,
 Gant an dud holl karet!

Diskennet a lignez huel
 E rannit d'ar paour ho tanvez,
 'Vit gellout beva ha mervel
 'Vel Hor Zalver er baourentez,
 O Sant Roc'h benniget, etc.

Mont a rit da velet bemdez
 Ar glanvourien geiz dilezet;
 Ho pedennou, ho santelez
 Dre holl a bare pep klenved,
 O Sant Roc'h benniget, etc.

Redet a rit yar zu keariou
 Distrujet holl gant ar vossen;
 E pep karter-rit burzudou,
 E tennit an dud a anken.
 O Sant Roc'h benniget, etc.

'Vit an nessa roit ho pue;
 An holl a deu da lavaret:
 « Setu eun ael a berz Doue
 Da zouten an dud trubuillet! »
 O Sant Roc'h benniget, etc.



Hag hirio c'hoaz euz an envou,
Velit an dud zo en anken,
Deuit da glevet o c'hlemmou,
Hag o fareit eus ar vossen,
O Sant Roc'h benniget, etc.

Ni gar pedi en ho chapell,
Gant hon tud koz ama savet,
Evit goulen ouzoc'h skoazell
Hag eus pep droug beza miret,
O Sant Roc'h benniget, etc.

Ni gar ive kass hor peden
En hon iliz dre holl brudet,
Ha daoulina 'tal ho skeuden
Var eun aoter ganeomp savet,
O Sant Roc'h benniget, etc.

Gouzout a rit, Sant galloudus,
Hor pec'hejou, hor gwall vue
A denn varnomp poaniou skrijus
Grit ma karimp lezen Doue,
O Sant Roc'h benniget, etc.

Mellezour an holl vertuziou,
Grit ma tilezimp ar pec'hed,
Ma zaimp d'an env var ho roudou
Evit beza holl kurunet,
O Sant Roc'h benniget, etc.

IMPRIMATUR :

Kemper, 21 a viz du 1924.

A. COGNEAU,
Vic. gén.

Bezit sonj : Chapel Sant Roch e Guitalmeze zo bet savet er bloavez 1642 goude ar vossen zu. — Diskaret gant an dispac'herien er bloavez 1793, eo bet savet a nevez ar bloavez 1822. — Ar pardoun a zo d'ar Sul kenta euz Miz Eost, hag doug ar miz e vez darempredet gant eun niver bras a belerined.